

**Fichenn enskrivañ da
DEVEZH-STUDI
D'ar Sadorn 29 a viz C'hwevrer 2020**

**Da gas da : KEAV
22 hent Mouliouen 29000 KEMPER
keav@keav.bzh / sofilehunseg@gmail.com**

ANV

ANV BIHAN

CHOMLEC'H

.....

Pgz E-meil.....

Priz an devezh : 30 € (mizoù pedagogel ha pred)



KAMP ETREKELTIEK AR BREZHONEGERION

***A ginnig deoc'h un devezh-studi
diwar-benn :***

**AR BREZHONEG ER SKOL :
EUS AN DESKIÑ D'AR PERC'HENNIÑ**

**KOMZ UR YEZH :
FRANKIZ HA REDIOÙ (SEMANTEK HA LEKSIKEL)**

D'ar Sadorn 29 a viz C'hwevrer 2020

Er greizenn Amzer-Nevez

56270 PLAÑVOUR

ROLL AN DEVEZH

Adalek 9 eur 1/2

Degemer ha banne kafe

Da 10 eur nemet 1/4

gant Gwenole LARVOL

AR BREZHONEG ER SKOL :

EUS AN DESKIÑ D'AR PERC'HENNIÑ

D'ar skol an hini eo e vez fiziet an aliesañ ar c'helenn brezhoneg d'ar vugale, pa oa bet un troc'h en treuzkas dre ar familhoù e-kreiz an XX^{vet} kantved. 40 vloaz war-lerc'h digoradur ar c'hlasoù kentañ e kaver ouzhpenn 18 000 bugel enskrivet en teir hentenn vrezhonek. An darn vrasañ anezho ne glevont ket kalz a vrezhoneg e-maez ar skol ha nebeutoc'h c'hoazh o deus ur vamm pe un tad a oar brezhoneg. Yezh ar skol eo evito ar brezhoneg, koulz lâret, ha n'haller ket lâret e klot an dra-se gant ar palioù advuhezekaat pe adlakaat ar brezhoneg da vezañ ur yezh ordin en eskemmoù etre an dud. Met n'eo ket ken du dazont ar brezhoneg evit-se rak gwelet e vez tud yaouank o tont er-maez deus an hentennoù a choaz bevañ un tammig pe un tamm mat deus o buhez e brezhoneg. Penaos e ra skolaerien zo evit sikour o skolidi da dalañ ouzh an devouderezhioù yezh neuze?

Setu danvez labour tezenn Gwenole Larvol a studi penaos e c'hell ar skolaerien mont en tu all d'an deskiñ ha sikour ar skolidi da vont war-zu ar perc'henniñ, evit ober seurt e teufe ar brezhoneg da vezañ o yezh dezho ha n'eo ket hini ar skol.

Gwenole LARVOL.

Skolaer divyezhek eo bet e-pad 15 vloaz e Douarnenez ha mestr-stummer e pad ar 5 bloaz diwezhañ. Abaoe 2017 emañ o labourat leun-amzer war un dezenn dindan renerezhioù Stefan Moal (Kreizenn an Enklaskoù Breizhek ha Keltiek, Roazhon 2) ha Laurent Gajo (Ecole de civilisation française, Geneva) hag arc'hantaouet gant kuzul-rannvro Breizh.

Da 12 eur 1/2

Merenn

Da 2 eur gk

gant François LOUIS

KOMZ UR YEZH :

FRANKIZ HA REDIOÙ (SEMANTEK HA LEKSIKEL)

C'hwi a gav genoc'h e vec'h libr atav, pa gomzit ur yezh bennak da choaz ar gerioù a faot deoc'h evit ezteurel ar ster a zo en ho penn ? Ha c'hwi a gav genoc'h ho pez frankiz atav ivez da choaz peseurt ster, peseurt sinifiañs a vo estaolet genoc'h, pa glaskit lâret un dra bennak ? Faziiñ a rit : lies-kaer e vez ar yezh a choaz evidoc'h ar sterioù a vo savet genoc'h hag ar gerioù a zay er-maez ag ho peg. Pedet oc'h neuze d'ober ur veaj e liveoù don ar yezh, àr ar vevenn etre meizad ha ster hag etre ster ha geriaoueg. Komzet e vo a-ziàr ar redioù leksikel, semantek ha semantek-ha-leksikel a gav an den a pa gomz ur yezh. Skwerioù a vo roet, keñveriet e vo ar brezhoneg doc'h ar galleg hag ar saozneg, ha gwelet e vo penaos e c'hell ar yezhonour hag ar geriadurour deskriv ar redioù-mañ.

François LOUIS

Kelennour brezhoneg eo, e Gwalern ar Mor-Bihan. Studial a ra brezhoneg(où) Bro Gwened, ar re pobl hag an hani lennegel. En e dezenn en deus deskrivet ster un nebeud gerioù a denn d'ar yec'hed, hag ar mod ma koublont doc'h gerioù arall, er rannyezh-mañ. E stumm a zo get an idiomatelezh ha get ar mod d'he deskriv. Labourat a ra e stern an deorienn yezhoniezhel *Ster-Testenn*.

'Tro 5 eur – 5 eur ½ Bilañs an devezh-studi